

*Augustin mis d'andi Mansec*

KANTIO E ZEVOSION GRAED GAND FE AG UMOLITE

War en ton:Ketch mervel,o ma Doue  
pe ouar en ton:Salut dah illise ma farrouse

Vit goul e hras de vin zalvet  
A me herent a mignonet  
Meusse gred or hantic de gannan  
De vont ouar en toniou kaeran.

Mar pliche gannah,o ma Doue,  
Apseti me hantic nevé  
Nibin savan e voues huel  
Betoe o pales itternel

Vit kustumi on ninio *enon*  
De bignal ouar du en nivo  
A de belad deus diaoulo *pellhaat*  
Klaske on huan no chadenno

3  
O pet true,o ma Zalver,  
Deus o krouadurien dister,  
Gand fe ha gand humilite  
E houlén o sikour bemdé

4  
Ne vin ket houas beur divun mad, *dihun*  
Na dikor tré om daoulagad,  
Saf on speret ouar du o tron  
Ag e hofamp dah on halon

5  
En non gomans deus er beure  
E hofamp dah,o ma Doue,  
On vouan,on labour pad en de *foan*  
De zikour peian dah om gle.

6  
Rog mont nom gouele,ma Jezus,  
Houlop o kraso prisius,  
Digor om diouvrech,on halon  
E houl o penedicion.

7.  
Mar scuellet ouar omp o penos  
E vezo zentel on repos,  
O kraso ker a béniget  
E chase kouit en drouk speret

8.  
Gwehes,on man drugarezus *Gwerc'hez, m...*  
On recomendet de Jezus,  
Nankouaéket o pugale,  
Nip so en danger nos a de.

9.  
Satan e stign pechou partout  
Vit om zromplan ag om zapout,  
Conduet Marie on fago *pijou*  
A gouefomket bars ni pecho

10  
Doeste de Satan a di viso  
On mam zentel houi dreho  
Kar alies tropad endé  
Zaf on peret ouar du Doué.

## II

A Houi,él mad on niniou  
 On miret deus on goal dechou,  
 Pelleit ouzip en drouk ele  
 Zo clak lazan dip on ine

## I2

A omped ol Zent a Zentezet,  
 En nan Doue,on vrotezet  
 Optenet dip dre o peden,  
 Treñi ouar on nenibourien.

## I3

Enebourien on niniou  
 E zelh de rodal ouar om zro,  
 Vit on dizreie di oar en nent  
 Bed pleutret gannah houï ol Zent.

## I4

A houï,on zad selstiel  
 Delhet ardant ouar nop o sel,  
 Heb oh,mip,noh netra e bed  
 Met krouadurien dianket

## I5

Houï oar erfad,o ma Doue,  
 Pegen riskus e on bue  
 Hep gout ma Doue béniget,  
 Alies meup o ofanset

## I6

Dré comzou a dré obériou  
 A non vanzi oar on voaniou  
 Ma doue,goul e ram pardon  
 Gandglahar vras bars nom halon.

## I7

O Zent Jozep,on vatron vad,  
 Deut de zeri on daoe-lagad,  
 Pe haruo eur on maro  
 Diredet buan oar om zro

## I8

Hep boh zent Jozep béniget,  
 On nine paour vo straviliét  
 O patron mad,deut en de-se,  
 Don has dineh dirak Doue.

## I9

Arhele zentel deus gloar  
 A tout kemete e neus pouvoar  
 On zicouret dont de nive  
 De veuli Jezus on Otro

## 20

Ma Doue,nip zo hirvoudet  
 En droien man hep o gouelt,  
 Akordib no parados  
 En niternite de rebos.

Fin.

les 3 et les 4 sont écrits  
paris sur le 7m.

ME BUE

Bretonet e Vreis-izel, didostet de glevet  
A houï e glevo kannan pes e mes niventet,  
Bremen, pe hon aru cos, zavet ma bugale,  
E mes hoant de zisglerian pene kectan ma bue

I  
Houant e meus de zisclerian ma bue tremenet,  
Ag anfine galse-ze draoe al deus pes so houarveze  
Lakad e ri ma vosip 'vit donet de rïman  
'Vit vo bra me hannoene ag ezet de ganen

2  
Esplikan ri ma homjo evel me he gleet,  
'Vit e vonit fasil a sklere, gand en ol comprenet,  
Vo ~~Vit~~ ket e houalh kemetse a kompozï zoniou,  
De gant vla goude vi mar, e vo comzet deus zon

3  
Mi zo zur e vo klevet mer e hini laret,  
Sel aze er zone ansien, a hoas e ve kanet,  
Annes e oua kompozet gand gemeneres,  
Mi mes klevet me zad kos, e konton deus onnes.

4  
Kar honnes e oa e chom bar en bourg Pont Melvez  
Pe oa laket on bro Vrance bars en tristimite,  
Tud e vervel gand naoun, duze, bars er heriou,  
Pe oa en dreitourien vras e komandi om bro

5  
Brezel a revolde e oa tre e ru ag er goen,  
A troad e binfidik oa ouar-houh er bequien, *chone*  
Lahet a mizeret tud hep reizon na zujet  
A kenkouls gand Fransizen e velt gand er Bochet

6  
Dre *ma* me ouantie e hokupi deus tout, *vijetie* plamet  
Met gand mantel vras er ler kalse e ve golaet,  
Kar der houlse, bar en Vrances, e oa kriminelet,  
E va-sakri tud o bro gouasoh e vit louenet.

7  
Ag er plah e gomzan dah *vije* dre abitu  
E kannan dei hunan leh chom dor zongo du  
Kouskoude velte endud dal e dize nehamant  
Met chom reel de zonzal ra met kreski tourmant

8  
Mont ouar benhent de malleur zo or gouir basione  
Ag outer der bouan speret e oas er galon *gwask*  
En non ober hi labour honnes e grumuze  
Pe ouar e kene zonnïou kos komposze re neve.

9  
Settu asze dre benos e vo deuzon komzet,  
Hober zoniou de gannan en no toueske, Bretonet,  
Hep dragasi me speret a hep non ziranzi,  
E vriad ouar me machine mes gret meur e hini.

10  
Or Gouenerves dabarde, hor rochedo bianne,  
Tre me merne a me hatverne e moa rimet unane,  
Ag e nose, goude kouan, mi e moa skrivet  
A der zadon, en Gouengamp, e oua d'in imprimet.

II  
Homan e meus gred, espres dober en dans-e dro  
Bars er jeuio ouar er mes, a bars e nonzezo,  
Nes ket chikoh vid or zon pe ve kompozet mad  
Dober en danso e dro ouar dachen en ebad

I2

Binzan e he antrenant evit en danserienne,  
A kaer a divertisant evit er zelerienne,  
Danset hardi, tud iaouank a reit beh do pato,  
A mi keite chomi iah, e zelho dah zonio

I3.

Pe zo roet di on don gand en Tad iternel,  
Mar brofitan ket deus-si, mi mon pehet mervel,  
Non ket kapap de barlant reol bars en galek,  
Met gonnet meus me bacho deus er skol brezonek

I4

Pe oua maro me mam baour, e ouane kast de Zuot,  
Ag e hen de vesa zaout de ros vras Gouidiot,  
Kano rene velt o estik bars en mesk me lonet,  
Pe vize zioul en amzer deus pel vizene klevet

I5

Ag lare grouet <sup>gwey</sup> er put oua chom en kuer ~~baoueline~~ ?  
Chomet on de chiloat, ouar benno me daouelin,  
Er plah viane e zo dud lein e ros e kannan,  
Hons e-mezi neus ar vouez dimeus e re gaeran.

I6

Biscouas bugel meus klevet e kannan evelti,  
Capap on de chom en dé de chiloue en ~~baazi~~ <sup>anezi</sup>  
E boue neuzen, e meus zonz ag ge ouan met bugel,  
E ouan techet de riman dre skient naturel.

I7

Plijout e re di deza ober rimasteno,  
Kar der houlese ma ket oas disket kalze zonio,  
A bopret e kanen kaer pes mije mivantet,  
A neus fors wouar pe sor tra tout e vije zantet

I8

Pe vijen koste e ven— vo, e bars ros viane,  
Alies vijen klevet deus ze harzo ezane  
Ag on breur din ena e chom e bars er vilajen,  
Ag bitie i galon klevet me hannaen.

I9

O nonzes oua deud der hier ag nivoua laret:  
Mi meus klevet me zam houar vit er beure abred  
Kannan velt eur rossignol gand ~~di~~ di moues haer ha skle  
Met true e moa deus si, kar ien oa en amzer.

20

Houi glefe me zad e min huali er zaout se  
A lezen me houar viane divetoh ni gouele,  
Goud e ret nemet eis la, ne ket fort en-nezi,  
Hont ken abred de vessa ne ra ne-met lauri *creva par le  
mini*

21

I goms vad a beniget me zad e chiaouas  
A hualet vije er zaout goude, biane a bras,  
Neuzen e mije anzer de chom bars bars me gouele  
A pe vijen deut e mes, hen de velet en ne.

22

Pe oa komanset en trin de roulal di gentan,  
En tre Gouegamp a Kares, neuzen e ouanennan  
~~Binzan~~ mije plijadur in gouelet e tremen,  
A juste en kreies me varko e oa harriden.

23

Neus ket disans e belzo, e ouan bed e vale,  
A tomed ne-voa me goad e tremen er lehse,  
Zantou e ren me halon velt don de demerad  
A zavet e oa endour e bars me daoue-lagad

24

Matreze e kafeh drol, pes e han de laret  
 Mi garje gouelet en trin o harreti or momet,  
 Vit mije gallet much hat-gouelt en terouer  
 Lehiou me bugalliaj a me houariou dister

25

Gar deñ noad e berzk vla, mi e moa o houitet  
 Ag e boa en nan amzer ze, ne ma ket o gouelet  
 Pe kouitais ti me breur e ouan et de vates,  
 Der houlse oa pe<sup>re</sup> biane a labouriou dies *pre*

26

Pemp skouet woar nugend er bla, oua vounis de gomto  
 Met e honnet enneze vije kals e bouaniou,  
 Mont der park de labourred din-dan en hol amzer,  
 Boueta moh a gouerro zaout, pe haruen er guer

27

Trei e rod de bilat<sup>l</sup> lane vije gred der houlse,  
 A ze vije war me hond zikour ober bemde,  
 Me dre me kreske m noad, mi zonje alies  
 E karjen binzan disket, binzan kemeneres.

28

Goude pemp-laves labour ma gred ~~bars~~ er feurmioù  
 Ma kad o nokazione just deus me diziriou,  
 Sakrifiet ma or bla de labourat 'vit mane,  
 Met pe krogis en daoe vla oua peiet din me vouan.

29

Pe zonjen en kementse mé mije kals e joa  
 Kar kals bravoh oa bed dingonnet me zam bara  
 Kontant vije me speret, kreski e re me stad  
 Kar beneuze ouan aru an tam plah dilikat

30

Vid-don de vezan biane ag o tammik dister  
 E moa troet diouar-non klas e boane a miszer  
 Disket e moa skrivou a lene on tam biene ivé,  
 Bars er feurme ouan bed e-rag e gand der vugale

31

Er bugel ere din skol e zo ouas de raze  
 Bars ni han no skrivet mad zo or pe ag an de *P et D*  
 Goude, bars me yaouankis, mi moa bet plijadur  
 A roet oua din e hras de chom onnes a fur

32

Gredan ket e ve une-nan kapap de lavaret  
 Ni voa gouelt nen yaouankis er merke fal be-naket  
 Mi bede dem zikour er gaeran stereden  
 A hones e neus parret alies ouar me fene.

33

Røet so dei ners a gras dober madelezou  
 Ag or golon dous, a pur, a lune a vertuioù  
 Neppi vedo e golon hal kaved konfians,  
 Car mi zo assur e-ouah e nivo rekompans.

leun

34

Er gomse e lardan dah 'vid kellenadures  
 A mar zentet dionti ne pezo kun james  
 A de bel goude vimi et ziouar en douar  
 Meur e hini bratiko a zelhon mimouar

35

Pe ganfet me hannoen, tud yaouank mi o ped  
 De resitan en-nezi velde he kombozet  
 Esplikan ran me bue guir velde 'n aviel  
 Mar ne noh ket 'vit kridi zo testo tost a pel

## Mansec 6

36

Ze zo kos e lavaran, nompas i zransformi  
 Nag er penno, nag e hreis, ne neus gaou enne-ni,  
 Gar nag e teufe Seseron i-unan de velet  
 Gredan ket kafe or guer kement neket rimet.

37

Mar meus gred o drouk benag e dont diompozi,  
 Mi o ped e greis kalon de zont demiskuzi,  
 A mar po bed plijadur klevet me hanaone,  
 O pedan de lavared 'vidon beb e beden

→ A mar game <sup>d'aneñv. 38</sup> e nivo velt <sup>e</sup> meus <sup>e</sup> sperans <sup>d'an zivon</sup>  
 Mi e bedo vidoh tout deus lein en trionfans,  
 A mar fel dah gouvei just piou neus iompozet  
 Traou er bajen ,fin er zone-man me hanno skrivet

39

Er bla mil eis kant perugend serten e ouan gamet  
 E bars en Kuerroterven, tremdost de Vurtulet,  
 Kentan inor oua gred din pe ouan deut ouar er bed  
 E oua zon kloh bras Bulat, en de ouan badezet

40

Ag en notro Ruduiller oua person er barrous  
 Euseunaou oa leshanvet gand taou pe dri lapous  
 Ag en notro Kerrenfleh e oa gand-tan Kure  
 A henes me badeias bars e nan-no Doue.

41

En daouzek ~~deves~~ e vis zest, or yaoues de greiste,  
 Leh oa badezet me mam daou-ugen vla rok se,  
 Met ben or penat goude pebeus tristediges  
 Ma dioueret me mam baour a douar er ouerhes

42.

Minores viane ouan nai just de noad e dri bla,  
 Meuze ouan kast de Zuot, laret e meus deja,  
 Ag er bugel e gol i vam e zo dene dine e drue,  
 Kar troet ve ziouar-nan heoul spland e kreiste.

43.

Mi zouet dah tout bonuer aman oar en douar,  
 De hortos kavet oh ldd deus eouruste er glear  
 Bevamp tout en esperans gandfe vras nom halon  
 Ne nalan ken kannan dah. Achu e me chanson.

FIN.

## ZON JEAN-PIERRER

Woar en ton:Vive le Rossignol

'Vit esplikan dah me bue, Daradamtirdenne,  
 Ne meus ket eam bad en de  
 Jean Pierer kouant a penner  
 A dieu klas a studi, Daradamtirdi.

I

Non nor dek munet pe ispen, Daradam tirdenn,  
 Mi ganno dah me vlanneten,  
 Jean Pierer kouant a pener  
 A dieu klas a studi Daradamdirdi

2.

Mi oa Jean Pierer touche la-mour Daradamtirdenne,  
 Ouan ket goal zod gand er labour  
 Jean Pierer kouanta penner  
 A dieu klas a studi Daradamtirdi

3

Me zad,me mam nivoa madoue Daradamtirdenn,  
 De gas hanon der skolajaoue, Jean Pierrer etc..

4

Der skolajo vit bin belek, Dara etc...  
 Dont de gure de Bluskelet,Jean-Pierrer etc...

5

Dont de gure de Bluskulet,Daradamtirdenne,  
 Pe de person de Lanvelek,Jean-Peirrer etc..

6

'Vit kon-dan dah en no gont ver,Daradamtirdenne,  
 Kaset ouan der siminer,Jean-Pierrer etc...

7

Met ze ne oa ket d'em souet,Daradamtirdenne,  
 Mi felle d'in bezan dimet,Jean Pierer etc...

8

A pe ouan bars siminer,Daradamtirdenne,  
 Mije met pres de vont ter kuer,Jean Pierrer etc..

9

Dont de neil ebat a di-ben, Daradamtirdenne,  
 Deus me skolaj e ouan di-jeme,Jean-Pierrere etc.. ?

10

Met hep-dalle ouan an-navet,daradamtirdenne,  
 Kelo d'em zad e oa kaset,Jean Pierrer etc..

11

Ag e oa lavaret den zad,Dardadamtirdenne,  
 Ne nivoa ket or bugel mad Jean Pierrer etc..

12

Me zad,me mam pe doa klevet,daradamtirdenne,  
 O hallonou oa glaharet,Jean Pierer etc..

13

O halonou oa glaharet,Daradamtirdenne,  
 Ouelts pesort mab divoa zavet Jean Pierre...

14.

Ag e teujontie prim demme herhad,Dardamtirdenne,  
 De vont der ger de labourat,Jean Pierrer etc..

15

Kerse oa gand me hostio,Daradamtirdenne,  
 Mont de labourad der parko Jean Pierrer etc..

16

Met goude kerse vev en den Daradamtirdenne,  
 A goude mervel ne ra ken Jean Pierrer etc..

17

Me zad e oa on den sever;Daradamtirdenne,  
 Ag e redgin or me dever,Jean Pierrer etc..

18 → *colin*  
Lakad er vourlen em herhen, Daradamtirdene,  
Or din delhen me zettojsten, Jean Pierre etc.. *traits? tendus*

19  
Deus-ze za-heoul de holoñ louar, Daradamtirdenne,  
Mi laboure velt onr forsar, Jean Pierre etc..

20  
Ben ouan bet pep-la gandme zad, Dardamtirdenne,  
Mi ma kavet merh on noh mad, Jean Pierre etc...

21  
E divoa pep kanskouet leuve, Daradamtirdenne,  
Mi moa kenmet-dal a pe pre, Jean Pierrerr etc...

22  
Neuzen e manp jouzet om dañu, Daradamtirdene,  
Kad plijadur gand ton madaou, Jean Pierer etc..

23  
Mon der jeuio a de nebad, Dardadamtirdenne,  
A barz er kuer or kuzine vad, Jean Pierrerr etc.

24  
Ouam ket bet pel e ober ze, Daradamtirdene,  
On mado vianne bemde, Jean Piere etc..

25.  
On or perbla ouaneit lipet tout, Daradamtirdene,  
A ne ouam ken vi to zapout Jean Pierre etc..

26  
Mar mije zentet deus me zad, Daradamtirdenne,  
Bremen e vijen plaset mad, Jean Pierrerr etc..

27.  
Mi vije bremen eur belek, Daradamtirdenne,  
E sermoni a brezek, Jean Pierre etc..

28  
Ag e lavaret de re-al, Daradamtirdenne,  
Dioual deus tan bras er bed-dal, Jean Pierrerr etc..

29  
Met nini zen ket e zant, Daradamtirdenne,  
Dislaret e hannon mar peus ouant, Jean Pierrerr etc.

30  
Bremen mo eur loua zeh de lipat, Daradamtirdenne,  
A-dieu jeuio a friko mad, Jean Pierrerr etc..

31  
Bremen e lipfeh er loua zeh, Daradamtridenne,  
A bars loje e za va beh, Jean Pierrerr etc..

32  
En-neib e vlamo di-gile, Daradamtirdenne,  
Ag om daou onp kos kouskoude, Jean Pierrerr etc..

33  
On huvre ma bed en nons-zal, Daradamtirdenne,  
Deus er lotri nasional, Jean Pierrerr etc..

34  
A ma gonnet er brasan pris, Daradamtirdenne,  
A deut de binvik ouar his, Jean Pierrerr etc..

35  
Met allas pe ouan divunet, Daradamtirdenne,  
E ouan tronplet gand me speret, Jean Piere etc..

36  
E greis zonjal ouan pinfik bras, Daradamtirdenne,  
E ouan paour du e velt o ras, Jean Pierrerr etc..

37  
Pe ne achu me hannoen, Daradamtirdenne,  
Han de gomans me viniñ, Jean Pierrerr etc..

38  
Bremen han dor pinijen bras (vras), Daradam..  
Gand Kof goulou a hanter noas, Jean Pierrerr etc.



39  
 Breman han dont de gouetan bro Daradamtirdenne,  
 Mi lavar dah tout kennavo. Jean Pierrer kouant a penner  
 A dieu, klas a studi, Daradantirdi.

FIN

SON YANIC

Woar en ton dans plonne

*Blunicy*

Mi oh lakafe tou de houarzine  
 Pe hon petra e zo houarvet  
 Rak on noh yaouank deus er ger-mant  
 E ve dorbolet gand e vrouek

?

gwreg

I  
 Ret e ~~dan~~ ve dan skubon a tordhon,  
 Mont gand er lianno der ster,  
 Hoas pe ne ve ket net e re-ze,  
 Nive bahajo leiz iler.

2  
 On devez dreist denol devezo,  
 Yannik e darekenpredet,  
 Ag non ober i veselo,  
 Un deus er gouer en neus toret.

3  
 Fidendoustadik, 'me Marharit,  
 Mi zo hont de vezan verbal,  
 Tolet o prago, me gouir vignon,  
 E po en disipline raktal.

4  
 Flike de flake, den daou goste,  
 Mi o tisko de deri gouer  
 Ma-hat de ouzoh e ben breman,  
 Er batielo ze zo ker.

5  
 Gouisket o brago, hast buan,  
 Me hefet brenman de gannan,  
 A mar veh pel er memes souben,  
 E vo hat-tomet dah anman.

6  
 Dipe de dape, de nantre galoup,  
 A Yannik de vort er rinvier,  
 A gand-tan onr paket liano,  
 Hiviz i vrouek a lereier.

7  
 Rei e ra de zavon a golves  
 O risan goude bars en dour,  
 Met de tont der ier Yannik ken pretet,  
 Alas e neus kolet onr lour

8  
 A pe nekontet er lereier,  
 Zo kavet une dispar en-ne,  
 A Yannik a resev e dare  
 Onr correk-sion hep true.

9  
 Kleke de klake ouar i vijas,  
 Mo tisko de gol lereier,  
 Het ouar o kis m'hos kamarad,  
 A rentet din e lour-ze yer.

## IO

A yannik de gomans galoupat  
 A lampat dreis de kled er pors,  
 Bed neus er maleur de non vlejo  
 A gomansas krial vors

## II

Krapad diskrapad ouar en douar,  
 A huchal grin e boues i ben,  
 Gouel vije dime bezan maro,  
 Vit kavet or vue velen.

## I2

Enervi e ren bars me diliat,  
 O klevet Yannik e krial,  
 Mar vije honnes bars me horden,  
 E dije gouelt or vue al.

## I3

Nag e ven barnet dont de niferen,  
 Seis la distu bad er mis zest,  
 Mar choazan biken er vadalen,  
 Ne neket hi e vezo mest

## I4

Homan zo un deus-ze re gouantan,  
 E zo aman bas er hontre,  
 Met ne nusoket i hivio  
 Kannan dihat di bugale

## I5

En an de zoue, potret yaouank,  
 Pe jonsfet breman dimezi,  
 Ne zelet ket deus merhet faro,  
 Nag ive deus o houantiri

## I6

Komerret or plah fur a parfet  
 A hō kontant de la-bourad  
 A mi zo zur e pon plijadur  
 Sambles on taou e tiskrapad

## I7

Er merhet kouant e zo purvuan,  
 Mechant a feneantezet,  
 Ag heszah poulious a huder  
 A kernio didan o bonnet.

*hez o orac'h*

Fin

## ZON ER HOUP

Woar an ton march

E bars er ker e Ouangamp, tal kichen er blomen,  
 E lun e verhet yaouank hor o ferioden  
 Danp d'amp tout, de Ouengamp lavar er merhet yaouank  
 Doup doup a der galoup hanp tout de ziski houp.

I

En noj gemenerezet e vo kerse gante  
 Pe vo tistro e renes a ~~gred~~ o stajo gante danp danp etc....

Re-2 2 gant

Pe-nos e resfoeit breman er hemenerezet,  
 Pe vo disket o micher gant tout er berzentezet, danp danp etc..

3

Breman refoeit o labour o hunan bars er yer  
 Ag hemenerezet ne divo netra d'ober Danp danp etc....

4

Er hons kemenerezet avanset oar en noad,  
 E beur debet o friko a lipet gand-te o vlad danp danp etc..

5

A kemenerezet e komanso micher  
 E vo ret de dilezen a mont de vates en kuer danp danp...

6

Micher er gemeneres zo hont breman de fal  
 Dre me he bet anviet e rok gand e re-al danp danp ...

7

Micher er gemeneres oa mad e ouah pel zo  
 Met breman ziouas dezi e zizaille e velgo danp danp..

8

Klemet vije e vezo gand en liel a bin eiel en ail d'ichen?  
 Selbe kemet e koustet diman ober me roben danp danp..

9

A ouas e deus divized gavet on tam amane,  
 Kar ~~peunan~~ pouan deus bed e-mezi, me danve oa re viane danp...

10

O po-kes kemeneres breman difo netra  
 Met or bannah dour bervet de trempan i zam bara. danp danp...

11

A oas e vo kaer dezi kaved on tam bara  
 Nag e ve bren e-nenan o kavet mad memes tra danp danp...

12

Pouan vras emeus nem halon e laret kement-se  
 Kar mi e nini gentan e ve roulet gand-te. danp, danp...

13

Kolet e meus me besken boue disul e beure  
 A gredan ket meus ezam de benan on nal neve. danp, danp...

14

Houantbras e meus de ouelan, ma Doue, pe zonjan,  
 Met o lakad de houerzine han dober dikentan. danp, danp...

15.

Mar mo met dour a bara de tremen barsme gouk  
 Vi forset de gastian, met ze ne rei ket e zrouk (elle est obès)

16

Lourtad e ra daou zornen, me gouelt gomans bin fal,  
 Ze zo kos meus non laket dorber or vicher al danp, danp..

17

Nini neus traou de drohon hal dioual dionte  
 Kar berniou kouperezet non gavo de raze. danp, danp..

18

Er zon-man meus kompozet non pas dre jalouzi,  
 Met 'vit tremen e nanzer ag e non amuzi, danp. danp...

FIN.

## ZON ER HOK

Woar en ton tamiron

Mi oa pedet gand Marivone  
 O tan miron, dessa orber di hok or zone,  
 Tammiron tambel miret o ye ye de la bigne bigne  
 Bigne bigne don ken le vin e bon

1

Vit dor plijadur di holon,  
 O tamiron, mi sente deus Marivone, tamiron....

2

Er bravan kogik zo er vro-man,  
 O tamiron, ne nanket goal bel e nezan tamiron..

3

Neman ket goal bel e-nezan  
 O tamiron, bars Bourg Pont-Melvez e-man, tamiron..

4

I pleuvitic e zo ken vlour  
 O tamiron, ken deut jalous hini tour, tamiron..

5

7. Lugerirantie a gi ken dous  
 O tamiron, evelt er zeï pe voulous gtamiron..

6

Dern en neze zo liou den aour  
 O tam tamiron, a hoyas e klemer er hok paour tamiron..

7

Facho ra deus an dud i di  
 O tamiron, e tont e nons da divuni tamiron..

8

Espisial Marivonnik  
 O tamiron, honnes garf ve marmik tamiron..

Fin

Woar tonio annaved  
Jezuz, Zaver adorable, zoursen en nol vado,  
Dimeus e greis me halon, me e houl o graso  
E-vit galout esplikan ac o riman er-fad  
En torfejo ouarvezet e bars en parrous prad.  
Jezuz, Salver adorabl, soursenn an holl vadou,  
Dimeuz kreiz ma c'halon, me a c'houll o krasou  
Evit galloud explican hag o rythman ervad  
En torfejou c'hoarveet ebarz parrouz Prat.

2

Mar permet me daou-lakad de chome hep skuille dero  
A me halon de lampat ,pe me moues de vanko,  
Me ganno dah or resit ac e zo trist meur-bed  
Sort neu ket en breis-izel e boue pel-zo kleved  
Mar permet ma daoulagad da chom hep skuilh daerou  
Ha ma c'halon da lampat pe ma mouez da vankoud,  
Me gano dac'h eur récit hag a zo trist meurbed,  
Sort neus ket en Breiz-Izel aboue pell-zo klevet

3

Bremen zo hanter kan la tremet, boue mis jenver,  
Oa graet ouas krimo spontus e bars non serrouer,  
Or vrek ac i daou vogel nivoa renket mervel,  
Tre daouarn or nifernal a tergeje kriminel  
Bremen zo hanter kant vloaz tremenet, boue miz genver  
Oa c'hoaz graet krimou spontus ebarz 'n'hon terrouer,  
Eur wreg hag hi daou vogel nevoa renket mervel  
Etre daouarn eun ifernal ha teir gwech kriminel

4

Oa ket hoas much kruel dirak en daou lagad  
'Vit neus kometet maillo, en den barbar, igrat  
Gouellet en tri valeousus draiet a massakret,  
Tranchet gan or vinneten goude bin a-somet  
N'oa ket c'hoaz muioc'h euzus dirag an daoulagad  
'Vit neus kometet Maillot, eun den barbar, ingrad,  
Gwellet an tri valheurus dailhet ha masakret  
Tranchet gant eun vinnetenn goude bezan assomet

5

Gouelet o istrimite ,en nol dud oa seplet,  
Gan dero no daou lagad ne ouantiet vit gouelet  
Mastalet a klabouset, a bunvet en no goad,  
Biskoas den e neus gouelet tud bars en tristoh stad  
O welet o extremite, an holl dud oa semplet,  
Ganddaerou 'n'o daoulagad, n'oant ken 'vit gouelet,  
Mastaret ha labouset ha beuet en o gwad,  
Biskoas den neus gwelet tud barz 'n'eur tristoc'h stad

6

Er bevaret de war-nugent dimeus e vis houere,  
En mil naou hant hanter kant, or gouener e beure,  
August Iran, pe zavas hes de gouelet i louenet  
Velt e man er gustumans gan tout er baizantet  
Er bevared-deiz warn-nugent dimeuz miz c'houevrer,  
En mil nao c'hant hanter kant, eur gwenner beure,  
Aogust Iran pa savas, eas da welet e loened,  
'Vel eman ar gustumans gant tout ar beisanted

7

Met non antren bars ni graou neu bed or rankont fal,  
Drek en nor e oa kuo or monter ifernal  
Ac e neus an asomet gand on tol ken mortel  
Ken e afons en noskorn bars en toueske i servel fall  
Met 'n'eun antren barz 'n e graou, 'neus bet eur rankond  
Dreg an nor oa o kuilhou eur muntrer infernal  
Hag e neus assomet gant eun taol ken mortel  
Ken anfonsez an askorn 'barz 'mesk e " cervel"

8

Er malleourus non gouel, loskas o urladen  
 Pini ne oa ken hanvel deus e voues o hristen,  
 A François Mari Je (I) oa just e aruet (I) elle n'a pas su  
 A gand er memes benvek e neus an diskennet l'écrire  
 Ar malheurus 'n eur gouel, a loskaas eun hurladenn,  
 Pehini na oa ken hanvel deuz eur vouez a c'hristen,  
 Ha François Mari Geffroy oa just o arruout  
 Ha gant ar memez benveg neus hen diskennet

9

Neuze hachas en-nesan gand troh ery vinetten,  
 Velt nivoa graet digile trohio don en ni ben,  
 Er mab oa hoas ni velle ag nivoa klevet,  
 E zonzjas e oa tapet i dad gand er louenet.  
 Neuze hachas anezan gand troc'h e vinentenn,  
 'Vel nevoa graet d'egile troc'hio doun 'n'e benn,  
 Ar mab oa c'hoaz 'n'e wele hag a nevoa klevet  
 A sonjas oa tapet e dad gand al loened.

10

Ag e viskas i vrago vounissan na gallet,  
 Laket i dreitie ni voto e-vit mont de vellet,  
 Met en non vont gand der pors Maillo neuz renkontret  
 Ag e lanpas oa-neszan velt do nouns acharnet  
 Hag a wiskas e vragou vounissan ma nevoa gallet,  
 Laket e dreid 'n'e votou evit mont da wellet,  
 Met 'n'eur vont gand ar porz, Maillot neuz rankontret  
 Hag a lanpas warnan 'vel eun ourz acharnet

11

Hast larret die, e-mes-san, plah e-man en arhant,  
 Petramant hes de vervel asze zoubitamant,  
 Er hanfart paour ken spontet deszan neus diskouezet,  
 Plah e oa en narhant ag e neus so tapet  
 Hast laret d(in, emezan, plec'h 'man an arc'hant,  
 Petramant a c'hez da vervel aze subitamant,  
 Ar c'hanfard paour, ken spontet, d'ezan neus diskouezet,  
 P'lec'h a oa an arc'hant hag e neus hen tapet.

12

Neus-ze krogas ni golier, a sklinjo en-neszan,  
 Gan-tan bars kraou er hezek, allas, 'vit in lasso,  
 Kouskoudé er paour kes kanfart gan di voues ankennet  
 Larre deszan, en nan Doue, Gustave nom laszet ket.  
 Neuze krogas n'e golhier, a sklijas anezan,  
 Gantan da graou ar c'hezek, allas, evit hen lac'han,  
 Koulskoude ar paour kaes kanfard gand e vouez ankennet  
 Lare d'ean 'n han' Doue: "Gustav, n'am lac'hez ket."

13

Mes er liou diramaille houle ket chilaouad  
 Ag e res dan or maro 'velt nivoa graet di dad,  
 Neuze sklapas en neszan entre dreid er henzek  
 Pere gand er vouanmant oa ive spouronnet.  
 Met ar lion diramaill 'n'houlles ket chilaouet,  
 Hag a reas d'an eur maro 'vel a nevoa graet d'e dad,  
 Neuze e stlapas anezan etre dreid alloened  
 Pere gand ar vouramant oa ivez spouronnet.

14

Fronsal er reitie no vrio gand zreid diskrapad,  
 Serten-amant e santeiet er houes dimeus er goad  
 Maillo neuze bartias dober dolleten,  
 A de goach i vinneten ive i kannadien  
 Fronsal rint n'o frio gand o zreid diskrapad,  
~~XXXXXXXXXX~~ Certenamant e santeint ar c'houez dimeuz ar gwad,  
 Maillot neuze bartiaz d'ober e doaletenn,  
 Ha da goualc'h e vinetten, ivez e ganadienn.

Mansec I5

Douget gand en drouk-speret dober traou kenkruel  
 A dre gellennadures graed dan gang i zrouk eñ  
 Neuze kontas en arhant dont de beian i hle  
 E oa deszan reklamet en de rok dabardé.  
 Douget gant an droug-spered d'ober traou ken kruel  
 Ha dre gellennadurez graet d'an gant zroug aël  
 Neuze kontas anarc'hant dont da bañan e c'hle  
 E oa d'ezan reklamet an deiz araog d'abardaez.

I6

Kentan hini e wellas netra deusze hrimo,  
 Oa tad kaer Auguste Iran, et dober on tam tro,  
 Velt e oa i abitud, er vejich en namzer,  
 Dont de velt i vabian ac ive ivab kaer.  
 Kentan hini a wellas netra deuz ar c'hrimo  
 Oa tad-kaer Aogust Iran, aet d'ober eun tam tro  
 'Vel oa habitued eur wouejik an amzer  
 Dont da wellet e vab bihan hag ivez e vab kaer

I7

Met pe hantreas en ti, allas, oa den ne-bed  
 E zonjas ne ouan ket pel, ouant war-dro o louenet,  
 Ag gin war i blijadur e vonnet de vellet  
 Non vont war dreuzo e hraou e he bed efroiet.  
 Met pa antreas an ti, allas, na oa den ebet,  
 E sonjas na oant ket pell, oant wardro o loened,  
 Hag hen war e blijadur hont ivez da wellet  
 'N'eur vont war dreujou e graou e oa bet effrayet

I8

E velt er paour kes kanfart oa met hanter gouisket  
 Ni houvé en touseske er goad meurbed difiguret  
 Er paour kes skons ken spontet e mes e oa lampet  
 Ag e es de Kergidu de glaske tud de vellet  
 E wel ar paour kaez kanfard oa 'met hanter wisket  
 'N'e c'hourve 'mesk ar gwad, meurbed defiguret,  
 Ar paour kaez koz ken spontet, er-maez oa lampet,  
 Hag a eas da Kergidu da glask tud da wellet.

I9

Kentan hini neus kavet hep bor komplimancho  
 E oa deut sambles gantan buan de Roharou  
 'Vit gallout non asuri deus pes oa houarvezet  
 Pe oa on hrime graet gan tud, pe tapet gand louened  
 Kentan hini 'neus kavet hep ober komplimancho  
 E oa deut assambles gantan buhan da Roc'harou,  
 'Vit galloud 'n em assuri deus pez oa c'hoarvezet  
 Pe oa eur c'hrim graet gant tud pe tapet gant loened

20

Met non antren bars er hraou ratal e deus gouelet  
 Penos er paour kes kanfart e oa assasinet,  
 Traillet a leun e drohiou, astennet e ni oad,  
 On tamik bien peloh e deus kavet i dad. let  
 'Met n'eun antren barz ar c'hraou, raktal 'neus gwel  
 Penaos ar paour kaez kanfard a oa assasinet  
 Drailhet ha leun a droc'hiou, astennet 'n'e wad  
 Eun tamm bihan pelloc'h e deus kavet e dad.

21

E vellet traou ken euzus o halon zo mantret  
 Gand er spont ag e nanken e mes intie sortiet  
 Ouantie est pell deus hraou e veljonitie e darre  
 Jevrois er paour kes devezour tal en taill ni hourve  
 O wellet traou ken euzus, o c'halon zo mantret  
 Gand ar spont hag an anken, ermaez int sortiet,  
 Oant ket et pell euz ar c'hraou, a weljont adarre  
 Geffroy, ar paour kez devezour, tall an teil n'e  
 c'hourve

22

Er memes possision velt den daou al ivé  
 Met en den apour oa ket oas peur golet i vue  
 Ober re jimijadenno bars ni stad truezus,  
 Hortos rentan i vue er paour kes maleourus  
 Ar memeus position 'vel an daou all ivez  
 'Met an den paour oa ket c'hoaz peur-gollet e vuhez  
 Ober re jimijadennou barz 'n'e stad truezus,  
 C'hortoz rentan e vuhez, ar pour kaez malheurus

23

Neuze partijontie on daou founis de di er mair  
 Davertiss en neszan de gas er heleier  
 Der justis, de medeusine, de cheffo er jarmet,  
 de tonnet de gonstati e hrimou e oa graet  
 Neuze partijont o daou vounus da di er maër,  
 D'avertissan anezan da gass ar c'heleier,  
 D'ar justis, d'ar meudecin, da cheffou ar gendarmed,  
 Da tonet da gonstati ar c'hrimou a oa graet

24

A didan nebeut amzer e deus non rentet  
 E bars en feurme Roharou leh e noa des indiket  
 Sever on daoulado, on bijajas agravet  
 Euzet deus er heleie e oa des annoncet  
 Ha dindan nebeud amzer tout o deuz n'em rentet  
 Ebarz feurm Roharou lec'h oa d'e indiquet  
 Sever o daoulagadou, o bisaj aggravet  
 Euzet deuz ar c'hleier e oa d'ê annoncet

25

Pe veljontie er viktomon, devjour, tad a mab,  
 Pars non stad ken truezus a ken abominab,  
 E larjontie e voues huel o halon frimiset  
 Ree-man e brasan krimou e meup biskoas goelet  
 Pa weljont ar viktinou, devejour, tad ha mab,  
 Barz n'eur stad ken truezus, ha ken abominabl,  
 A larjont a vouez uhel, o c'halon fremisset,  
 Re-man eo brasan krimou meump biskoaz gwelet

26

A neuzen er medeusine ratal bizitet  
 Jevroy en den maleourus oa ket hoas desedet,  
 'Vit kas en-nan de soanignal dospital Lannion,  
 'Met war en nend e vonnet harretas i galon  
 Hañ neuze ar medisin, raktal neuz visitet,  
 Geffroy, paour kaez malheurus 'n'oa ket c'hoaz decedet  
 'Vit kas anezan da soagnal d'Hopital Lanhuon,  
 Met war an hent o vonnet c'harretas e galon.

27

Konstatet e o marie dendum assasinet  
 A zebeliet or horvon, a komanst en nanket,  
 Met ben neuze Roharou oa arru lun e dud  
 Deus pever horne er barrous pe voar klevet e vrud  
 Konstatet eo o maro d'an dud assasinet,  
 Ha sebeliet o c'hrovou, ha commanset an enquête,  
 Met ben neuze Roharou oa arru leun a dud,  
 Deus pevar c'horn ar barrouz pa oa klevet ar vrud

28

Gand otoeo, motoeo, en vello a war droad,  
 Tout en dud neme dijanje e bars en barrous Prad  
 Gouelladek, esklamadek a potret Kollered  
 Enep den dorfetourien a oa ket hep zujet  
 Gand autoiou, motoiou, en vello, ha war droad,  
 Tout an dud oa diranjet 'barz en parrouz Prat  
 Gouelladeg, esklamadig ha paotred collered  
 Enep d'an dorfetourien ha oa ket hep sujet.



29

Er jandarmed e veske ag e intoroje,  
 'Vit essa kat sklerrijen founis voar gemet-se  
 Ag e divoa remerket war galse e vuselo  
 Penos e divoa zoupson e war Gustav Mailllo.

Ar gendarmed a veske hag a interroje,  
 'Vit essaat kâd sklerrijen, vounnus war gement-se,  
 Hag adevoa remerket war galz a vuzellou  
 Penaos a devoa zoupson war Gustav Maillot

30

De bep heur goude hrimo Mailllo oa rankontret  
 E bars kafe er Mairi et gand der jandarmed,  
 Ag lavarjontie dessan penos oa akuzed

'Vit bezan en torfetour deus-ze hrimo oa graid  
 Da bemp eur goude ar c'hrimou Maillot oa rankontret  
 Ebarz kafe ar Mairie, aet gant ar Gendarmed,  
 Hag a lavarjont d'ezan penaos oa akuset,  
 'Vit bezan an torfetour deuz ar c'hrimou oa graet

31

Ag amza prim e mes-ze e lar er wirionne  
 Kar i zur de bunision e vo dousoh goude  
 Met Maillot e respontas gand 'i air hours a brud  
 "On den drol on, matreze, met nonket laher tud."

Hag amzav prim, emeze, ha lar ar wirionez,  
 Rak-sur da bunision vo dousoc'h goude.  
 Met Maillot a respontas gant e air ourz ha brut,  
 Eun den drol oun, marteze, met n'oun ket lac'her tud."

32

Met er jandarme ken a droad founis e gistionne  
 A gand komjo ken prestet Mailllo e non drohe,  
 A gand or gomse seullamant nivoa non ziskuiliet  
 A ne oa ken 'vit zeri pes-ze nivoa larret.

Met ar gendarmed, ken adroit, vounnus a guestionne,  
 Ha gand komjou ken prestet, Maillot e n'em droc'he,  
 Ha gand eur gomz seulamant nevoa n'em ziskuiliet,  
 Ha na oa ken 'vit serri pez nevoa laret

33

Neuze oa minnotezet a kaset der Mairi  
 'Vit binzan intoroget oar o maro o zri  
 Huchal re en dud war nes-zan velt huchal oar bleie  
 Met dre me oa ajante oa ket e zroat din skeie

Neuze oa minnotezet ha kasset d'ar "Mairie"  
 'Vit bezan interroget war o maro o zri,  
 Huchal rae an dud warnan 'vel huchal war eur bleiz  
 Met dre ma oa ajanted, oa ket "droit" d'hen skei

34

Neuze houljontiee dikantan pelah nivoa laket  
 En narme oa ni zorn kruel e skoe ken kallet,  
 Ag e respontas i-zel en nivoa in koachet  
 Bars non toul en douar 'vit vije ket kavet

Neuze c'houljont digantan pelec'h nevoa laket  
 Anarm oa 'n'e zorn kruel a skoe ken kalet  
 Hag e respontas izel a nevoa hen koachet  
 'Barz 'n'eun toull bars an douar 'vit vijet ket kavet

35

Gand i air ken kontristet a fos humiliet  
 E zonjas er jandamet nije a boiset  
 Neuze pe oa kistion dont de velt kenmetse,  
 Oa leusket ni liperte de vont sanbles gantes

Gand e air ken kontristet, ha faoz-humiliet  
 A sonje ar jandarmed a nije aboueset  
 Neuze pa oa kistion dont de welet kement-se  
 Oa leusket 'ne liberte da vont assambles gante

Mansec I8 goude kreiste

36 Met non vont oar lein er hars der zul  
 Tiskarres e nepekteur e oa deus goste,  
 Ag in lanpas entual; neuze oa partiet  
 A hini nes-ne oarre war bezort tu oa est  
 Met n'eur vont war lein ar c'harz, d'ar zul goude kœeisteiz  
 Tiskaraz an Inspecteur e oa deuz e goste  
 Hag a lampas en tu all; neuze oa partiet  
 Ha hini anê na oare war beseurt tu oa ~~atx~~ aet.

37

En pad tri devez hanter neuze oa bet collet  
 A tout tud en terrouer e oa emossionet  
 Jandarmet tout er hontre ag or ber sivillet  
 E oa e klaske en-neszan a vije ket kavet  
 Epad tri devez hanter neuze oa bet kollet  
 Ha tout tud an terrouer oa emotionnet  
 Gendarmet tout ar c'hontre hag eur bern civillet,  
 Oa o klask anezan, ha vije ket kavet.

38.

Met gand annoud ag e naouen ne oarre pelah monnet  
 Ag es de barg er Moal zonjal bezan lojet, lojet  
 Ag e kaves er feurmier traou er pors en-ni za  
 Ag e tresa deszan ag koseie bra  
 Met gand an naon hag an anoued, na oare ket p'lec'h monnet  
 Hag a c'heas de bark ar Moal, o sonjal bean lojet,  
 Hag e kavas ar feurmier, traou ar porz 'n'e sav,  
 Hag a c'heas tresseg d'ezan hag a kosee brao.

39

Mi, e-mezan, o zo blammet de vin graed er hrimo,  
 A kouskoude meus ket graed, divetoh te welo,  
 Mip e oa kamaradet, gout e res boe pelzo,  
 A martreze, emezan, te houlfe me lojo.  
 Me-emezan, zo blamet da vezan graet ar c'hrimou,  
 Ha koulskoude meus ~~gwreg~~ ket graet, diwezatoc'h te welo,  
 N'imp a oa kamaradet, gout a res, abaoue pell-zo,  
 Ha, marteze, emezan, te c'houlfe ma lojan.

40

O, ia, fat, me er feurmier, Gustav, lojet e vi  
 Mi hia de velt me loened, kers bopret bars en ti,  
 A pe antreas enti tout e mep klevet se,  
 Oa kas mont deus skoste er ~~vdek~~ e oa bars gouelle  
 Oh, ya vat, me ar feurmier, Gustav, lojet e vi,  
 Me ya da welet ma loened; Kerz bepred barz an ti.  
 Ha pe antreas an ti, tout meump klevet se  
 ? Oa ~~kerz~~ <sup>kerz</sup> mont deus koste ar wreg e oa barz 'n'he gwele

41

Spontet, ~~gwreg~~ groek a bugale, komanjontie krial fors,  
 Ag noas a dierhent oantie lanp er pors  
 Met ben neuze en toul e nor oa aru jandarmet  
 Prevenet gand er feurmier ag o bern sivillet  
 Spontet, gwreg ha bugale, komansont krial vorz,  
 Hag en noaz ha dierc'hen, e oant lampet er porz.  
 Met ben neuze en toul an nor oa arru jendarmed,  
 Prevenet gant ar feurmier hag eur bern civillet

42

Ennan neuze oa tapet a chadenet ratal  
 Nivoa ket bet kalze chans e vont de barg e Moal  
 Skoed vije oar-nezan, hijet a dihijet  
 A netra ne lavare met goul bean lahet  
 Ennan neuze oa tapet ha chadennet raktal,  
 Nevoa ket bet kalz a chans o vont da Bark ar Moal  
 Skoet vije warnan, hijet ha dihijet  
 Ha netra na lavare, 'met goull bean lac'het

43

Hola,meze,den ingrad,de derme zo re ver  
 Zonj,hardi,rog e varvi,feus pinijen dober  
 Dre hecho lous ha teval e vije graet dan kerzad  
 A tamo tolieo tape a rin ket dezan vad

Hola,'meze,den ingrat,da dermen zo re vër,  
 Sonj,hardi,araog a varvi,feuz pinienn d'ober  
 Dre hentjou louz ha tenval oa graet d'ezan kerzet  
 Ha tammou taoliou tape,rint ket d'ezan vad

44

Deg mis e bed er prizon e bars Lannion  
 Hortos mont de Zan-Briek dor i gontrision  
 Amzer neus bed de zonjal tre i fod ihunan  
 E tout i simeganjo,i valeur,ag i boan.

Dek miz e bet er prison ebarz Lannhuon,  
 Gortoz mont da Sant-Brieg d'ober e gontrision  
 Amzer n'eus bet da sonjal,dre e faot ec'h-unan  
 E tout e zismegansou,e valheur,hag e boan.

45

Setu bed i zujamant,parnet e der maro  
 Goude i valegries,et man ive i dro,  
 A dre ners er guillotine finiso i vue  
 Gras dan de vin bardonet bed dal gan Doue.

Setu bet e jujamant,barnet eo d'ar maro,  
 Goude vallegriez eman ivez e dro  
 Ha dre nerz ar 'Guillotine" a finisso e vuhez,  
 Gras d'ean da vezan pardonet er bed-all gant Doue

46

Doue de gavet true deus vam neus gannet,  
 Or hrouadur e sorse,ze zo trist a kallet,  
 Dizeh gan poan speret e ouelo nos a dé,  
 Kenment hini e zo mam e gle mad gonpren-ze

Doue da gâd truez deuz ar vamm e neuz gannet  
 Eur c'hrouadur a seurt-se,ze zo trist ha kalet,  
 Dizec'hed gant poan spered,o ouelo noz ha deiz,  
 Kement-hini a zo mamm,a dle mat komprenn-ze

47

Mi o ped,ol Vretonet,perre zo deus i vro  
 Ne froases ket i famille dre goms,nag orberrio,  
 Rins nitie na kos na kiriek de hrimo e' neus graed,  
 Ag e neus meer a glahar hep e deus merritet

Me ho ped,holl Vretoned,pere zo deuz ar Vro,  
 Na froaset ket e familh,dre gomz hag oberou,  
 Ar re-ze nint na kaoz,na kiriek d'ar c'hrimou a neuz graet

48

Allies e meup klevet gandtud kons peurvuan  
 Ne fote ket dip houezine deus malheur on nissan  
 Kar Satan gand i zoufles neses mui de houeo  
 Ag e had tristediges trouesk kalze e famillo

Aliez meump klevet gant tud koz peurvuian,  
 Na fosteket d'imp c'hoarzin war valheur hon nissan,  
 Kar Satan gand e souflerez na cess-ket da c'houe'ar  
 Hag a c'ha tristedigez 'mesk kalz a familhou

49.

Mi o ped,ol gristenien,rog dont de finissan,  
 Klaskamp en notre Doue partout er pen ketan  
 Hennes er guir alvoe don hampeche dober drouk  
 A barven er Guillotine naio ket oar om gouk.

Me ho ped,holl Gristeien, 'raog dont da finissan,  
 Klaskomp an Aotro Doue partout,er penn-kentan  
 Henez eo ar gwir al'houez d'hon hampesche d'ober drouk  
 Ha barvenn ar Guillotine n'arruo ket war hon gouk.

Achu eo.

1947

I

Disul ar beure, beure, pa oant vont d'an overn,  
Me glevas eun evnig, o kanan er bod spern,  
Hag a larean evnig, facil mat da gomprenn:  
An tamou merc'hed yaouank, na glaskont 'met toaletenn.

2

Pa gomans ar grenardenn, eun tammig da rakal,  
Eun habit nevez, nevez, a reko kavet raktal,  
Eun habit deuz ar bravan, e reker kavet d'ezhi,  
Kar, ken a vezo prenet, na bader ket ganti.

3

Red vo prenan d'ezhi, eun habit deuz ar c'haeran,  
Hag eun tog pe eur bonet, deuz ar mod diwezan,  
Hag evit bezan brasoc'h, deus kostez Yann pe Job,  
Deuz kemeret ar model diwar tog an Eskop

4

C'hoaz so kokenou bihan, bris kaer deuz andibab  
Euntammig mat bianoc'h 'vit boned ar Pab,  
Arc'hantet hag alaouret, ha lugerni a ra  
Hag e c'hano e latin, m'eus ankouet déjà.

5

Eur vrochen aour pe berlez, so gante en o goug,  
Nag a ve vall o c'hiviz, ze n'eo ket eur gwall droug,  
Eur sac'h 'vel eur vuzetenn, en pingn dimeuz o skoaz,  
Evel tud o vont d'ar c'histin, pe klaskerien vara.

6

O robennou zo ken berr, ken kazi ve gwelet,  
C'houler ket laret pelloc'h, divunet mar keret.  
Ma vijeient bet muioc'h c'hir, a vijeint bet propoc'h,  
Ha da bennou o daoulin, a vije bet tommoc'h

7

Pa antreont an iliz gant diouar dizolo,  
Lakeint Sent Koz Breiz-Izel, gant ar vez da ruo.  
Laret ra an evnig, neket eur merk honest,  
Mont dierc'hen d'an Iliz, lec'h a tléer bezan modest

8

C'hoaz, emean, zo arru eur mod, gléd ket bezan aez,  
A stageint deuz o dioukouarn groguilhen Sant Jakez,  
Ar mod-se kentrubuilhs, grede ket a réno  
Kar red e d'e o lemmenn ken mont n'o goueliou

9

A lemmenn hag a lakenn, ze so bern embarras...  
Hag an tri-c'hart dionte, o c'houraj n'e ket bras  
An dimezellet yaouank, fell d'e bezan fichet,  
Tam pis, evit al labour, toaletenn, a vo bepred

10

Ha pa ve bet eun habit, e ve pres d'e sapout  
Da c'halompat an dansou, da gemet toull zo tout  
Laret a re an evnig, aman en Breiz-Izel,  
A c'ha ar merc'hed yaouank da nojeta re-bell.

11

Ma vijenn bet, emezan, bars en plas ar re goz,  
Mije graet d'e n'ont serri n'o loch pa vije nonz.  
C'hoaz a lare an evnig, gave ket gwall ezet,  
A welet pesort mojou deus breman kemeret.

12

Badijonnet o joudou, ru tanet o bégou,  
O iezou a zo vifoc'h, evit ar ruan drapeau,  
Laret a re an evnig, e-mesk e gomjou-all,  
Al livaj edeus breman e kavet treset fall.

I3

Al livaj a deus breman na gavet ket gwal vra  
 Kar henez lak o bisaj al liou d'ar chocolat,  
 Mar plije d'e kement-se livaj an Algérie  
 Deus met kemer ar bateau da gass aneze d'i

I4

Laret a re an evnig, beg ar bod o kanan:  
 Rekont dilez ar mod-se, breman benn kentan c'hanv  
 Red a vo d'e nont gontanti deuz o liou naturel  
 Ha n'ont pars kemer skoueriou war tud ar broiou pell

I5

Laket a reont brageier, memez mod 'vel paotred,  
 Et int d'ober Gilguigui, méz meuz o laret  
 Laret a re an evnig, ar Mestr a vacho sur,  
 Kar, n'euze ken en Breiz-Izel, a verc'hed yaouank vur

I6

N'ont wiskan evel paotred, marteze zo pec'hed  
 Rag barz an amzer gwechall, ze oa gwall divennet,  
 Ha gant-se merc'het iaouank laket intension  
 Gant aoun e teufe Satan, da dostat d'o kalon.

I7

Laret a re an evnig, dre respet evit-e,  
 A kane d'e verc'hed iaouank evit ober kentel d'ê  
 Laret a re d'eze mont gant o hent a zeün  
 Ha praktikou eun tammig deus kanaouenn an evn

I8

C'hoaz lare an evnig, ken dont da finisso  
 Reko laret d'ar baotred eun tamm ivez d'o zro,  
 Reko laret d'ar baotred eun neubadig konjo,  
 Kar glac'haret e gante ar marc'hadour tokou

I9

Daleg ar platan paysan dont da brasan Aotrou  
 Tout mant en diskabel, evel tud ar buroiou,  
 Weler met pennou frizet, pe rannet ha ciret  
 Barz ar voar hag ar pardon, ha memez n'eur eured

20

Mar continu ar mod-se, a lare an evnig,  
 Ar varc'hadourien tokou c'hall serri o boutig  
 Da bourmen war ar pemdeiz deuz breman blouzennou  
 Tout int arru, gwennedourien aman barz n'ont bro

21

Ha colhier bras o roched, savet war goure tout  
 Nag e ve toull he lostenn, ze zo affer da c'hout,  
 Awejou e vint gwisket gant dilhad Amérique  
 Pep-hini nont zibrouilh, bouez e deut ker ar c'hig

22

Met peze kave ar gwassan, eo gant ar ganfarded  
 Gant jeuioù hag an dansou, eo dallet o spered,  
 Ha ken goaz gant ar butun, ma dije gallet kad  
 Oant capabl da loskat moged, muioc'h evit o sad

23

Na welet ken, emezan, eur c'hanfard perzeg vlaz,  
 A gemet na vutun ket pa c'houll ober dija  
 Tout man klenved ar butun gravet ebarz n'o fenn  
 Prez a deuz da vezan kosoc'h vit kavet o c'hartenn.

24

Essa réont ober o baro, rog ve diwanet,  
 Rag neuze a sonj gante, e veint gwelloc'h goasset  
 Pa bresanter d'e dilhad ha gonvena ket d'eze  
 A kontaint ganto mammou ken a spontant aneze.

25

Arog o anaoudegez eo deut o drougiez  
Hag a reont kalz a drubuilh d'o mammou aliez  
Koulskoude m'ar dont sonjfeint, ar paour kaez bugale  
Men c'hoaz deuz beg o friou al laez bet digante

26

C'hoaz a lare an evnig, neus kalz a boan spered  
Bouez zo roet eur gartenn a butun d'ar merc'hed  
Kar ar c'hoz verc'hed yaouank, pere deus ket eur parr  
A gemer tout o c'hini evit ober marché noir.

27

Ha gwelet re ar mammou, pe dijet bet butun  
A nije bet ennuiou arog fin ar peder zun,  
Arruout re ho mab hennan da c'houlén digante,  
Kalon ar vamm zo tener, n'eo ket evit refusi

28

Abenn ar sunn diwezan arru an tad ivez,  
Me na meus ken a vutun, pelec'h eman da hini-te  
Roet meuz ané da Bibi, pa del'che riotal  
A Yann a gomans neuze ober d'ei kement-all

29

Gant eur vouez rust ha kalet ober d'ei eur bern trouz  
Fentus ouac'h e gwelet reñ butun d'eur vri lous,  
Set aze ar blijadur devo gant, e c'hartenn  
Da vezan pad e buhez etre an norz hag ar ienn

30

C'hoant bras a nevoa an evnig da lavaret d'ei  
Gwellan tra e devoa d'ober evit n'ont d'abarassi  
Sklapan gante he butun, d'e da nont bartaji.  
Ha na defeint ket goude d'embêti anezi

31

Met rog fin e ganaouenn, eo deut libr ar butun,  
Breman a c'hallo Yann ganfard kavet e damm peb sunn  
Hag ar chikerien ivez vo druoc'h o geno  
Ma vegallet delc'hen plouz, vo graet teil d'ar pato.

32

Laret a ra an evnig deuz a greiz e galon,  
D'an dud n'ont pars n'ont facho, hag ober reflexion  
Ober mad ar reflexion, ha nont pas nont facho,  
A surtout ar vugale, senti deuz o mammo

33

Nijal a reaz an evnig ha sevel a reaz an Er  
Et e da c'houlén pardon vidomp digant Sant Per  
Nijal a reaz an evnig hag et e war bellaat,  
Mil bennoz d'al louen bihan, kar komzet neuze a vat.

Fin

Composé par Madame LE MANSEC

née Augustine LE FLOHIC

PONT MELVEZ

Propriété réservée (sic)

Cette dernière chanson n'est pas écrite de la main  
de Madame Mansec à la différence des autres. L'ortho-  
graphe en a été légèrement revue par l'abbé Guégan,  
recteur de Pont Melvez. Le texte original n'existe sans  
doute plus.

Fin du Cahier

fini de copier le 19 décembre 1951